

- 47 -

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

15. ANN DURZUNEL

Kalz a amzer amez kollet o stigma va lasou
 klask tizout ann durzunel kousket war ar brankou.
 Na distignet eo va las ha tennet em eus fall,
 tec'het eo ann durzunel ha nijet er c'hoad all.
 Dioc'h ann noz ha dioc'h ar mintin me 'glev al laboused
 o kana dre ar c'hoajou, e blenchou 'r gwez pignet.
 Ne deuz hini anezho hag a drid va c'haloun
 par ma ra ° ann durzunel o ouela he mignoun °a-us:mouez
 - ma teu ar chasseur iaouank da ober din° mervel °komp:
 birviken n'ankounac'hain maro ann durzunel. dei
 ma teu ar chasseur iaouank da ober din° mervel °komp:dei
 me a varvo gant glac'har ia d'am mignoun fidel.

 petra eo ta, turzunel, a dammant ho kaloun ?
 - maro eo, emezhi, va fidela mignoun
